

12

- P L E U V I A N -

I

O Pleuvian, o kaerran bro
Gant ar mor glaz 'ra d'ei an dro
He zouriou tan, he rec'hel braz,
'Tiwall an Erw, "Nean Buaz"

2

Felle 'ra d'ac'h eun tól-lagad kaer
War ar mor don, war ar pellder,
"Krec'h-Maout, Kernaod ha Roc'halzi"
Gant Krec'h-Katel 'vo eun dudi

3

Da vintin ar mor o losken
Ar gobiri o gweliou gwenn
O vageal, skanv ha mibin
Dawit an traez pe ar bizin

4

Set eman war dreuziou he dor
Itron Varia an Arvor
Kemer a ra kalz a zoursi
Eus he bugale, merdidi.

5

Mar be an avel o iudal
E' klevfet ar mor o krozal
Hag e welfet ar gwagennou
O lampat gant ar roc'hellou

6

Eus "kervajen" da "Borz-Chaden"
'Zo eur vrao a valeaden
Evit gortoz eur blujaden,
En hanv, gwellan diskwizaden!

- I) " Chas "Kernoda" ~~xxxxxx~~ oc'h harzal..."
a lavar ar bobl.

7

O na da gaerran gweladen
Er c'huz-heol ru war "Gervajen"
Ar mor, ar gerreg alaouret
Laret e ve an oabl goret!

8

Kalvar dispar benerez ru
Buhe Hon Salver a bep tu,
Kaerran kador d'embann ar Fe
Dirak ar mor, braz 'vel Doue!

9

Evit prezeg an Aviel
Dre hon Bro garet Breiz-Izel
~~Kort~~ hon sent koz ~~beus~~ douaret
E Pleuvian, "Porz-Benniget".

10

'Tal an tour koant, eur berlezen,
Perlezen gaer eur skol gristen
Evit kelen ar yaouankiz
Mestrezed akwit e peb giz!

11

Faro eo iliz hon zadou
Gant gwareier ha skeudennou,
Dudius enni ar moueziou
Pa dregern gante an ogroup!

12

Patron Pleuvian eo Sant Jord
'Ro graz ha sikour a bep sort
Bezan hen deus meur a gure
Evit diwall e vugale.

13

Itron "Rojadou" 'ouel bepred
He chapel goant 'zo diskaret
He skeuden gaer 'zo en iliz
Pedet 've gant Pleuvianiz

14

Itron "Brestan ha Sant Anton
Evel Sant Ian 'n'eus o fardon
N'eus ket welloc'h d'o enori
'Vit mont gant fianz d'o fedi

15

Ar zaout 'zo war ar melchon ru
En o bleud war ar peuri dru,
Diwallit hon loenadigou
Sant Anton, pellait an drougiou!

16

Eur vamm gant he fôtrig bihan
'Welan o vont 'trezek Sant Ian,
D'ober, gant daerou he feden
Da c'houl d'he mab ar sklerijen

17

Sant Loranz n'eo ket ankouaet
Duhont war e dosen kleuniet
Pedet a ve an den santel
Daoust na weler ken e chapel

18

Enoromp Otrou Sant Erwan
A studias e Pleuvian
Gant e vestr brudet Ian Gerhoz
E zal vras ar presbital koz

19

Kanomp gant joa ha levenez
D'abostol bras ar C'hrag-Enez
Kanomp d'an aotrou Sant Vode
'zigasas d'imp-ni ar gwir Fe

Aotr. P. BESCOND